

Pardon braz Pont-L'Abbe

d'ar seiz a viz Eost 38

Penn-Rener, Marcel Cachin, Senatour ar « Sein », en Pariz



Ton : *Breiz da virviken*, pe ton : *ar Goureüerien, war he c'hed.*

Kenta pennad

1

Kenvrôiz, bezomp war evez ?
Rag warc'hoaz e man deomp an de,
Da vont gant stad ha levenez !
A vern da Bardon Pont-l'Abbe ;

(Ad-taol (*Goureno*))

A vo kalz kaeroc'h gan eomp er bloa-man,
Hor c'Hannadet 'deuio dezan ;
Beteg deuz Pariz, læc'h m'aint o tifen,
Ho gwiriou d'al Labourerien ;
Republikanet, paotret a galon !
A gerzo dalc'hmad gant an hent gwirion,
Deomp holl da gana dê gloar hag enor !
Ma voint êru mad gant Breiziz-Arvor.

2

Ho mennad eo ar Peoc'h paduz,
Er Bed-Holl en tre ar boblou,
En despet d'eur bern tud noazuz
O klask ren c'hoaz dre vrezellou :
Vel ebarz er Spagn, læc'h e ren ouspen,
Gant tud kaez, kernez ha bosen !
Ha ma ne eno treitourien al lanz,
Vo gret ar memeuz taol en Franz ?
Læc'h 'so bed kavet armou spont a leiz !
Koachet mad dre holl gant an dud direiz :
Goulennomp gant nerz ma vefont barnet
Vel tolfedourien, an dud miliget !

3

Hirie gant Brëtonet Pariz
Vo diez ober truchiri !
Dre ma z'int stourwërien iskiz,
A wel sklaer barz en pep c'hoari ;
Rag an n'heb a renk c'hoari mouchic-dall (?)
Zo hen kabluz hag an dud fall ;
A garfe gwelet gant ar c'Hagoular
Hom Bro en tan hag en glac'har !
Ma 'vo red d'ar re 'zo en penn ar Stur
Laket eun harz krenn d'an dud losk-udur :
Kanomp-ta d'hom re, meulendi ha gloar !
Ha gopomp gante « Bec'h d'ar c'Hagoular ! »

Eil pennad

4

Breiziz 'so tud de n'em zikour,
Ar seurt na weler ked nemeur,
Ar c'hosa nê 'zo Senatour,
Harpet mad gant he genvreudeur ;
Rag Marcel Cachin, dre m'eo den a boell,
Prezeger reiz, speret uhel !
Neuz trec'het er Sein' war rum ar re vraz,
Neuz bed dislaret a viskoaz :
Douget gant Breiziz ! 'vo warc'hoaz gante,
Evel Penn-Rener Pardon Pont-L'Abbe ;
Læc'h e komzo zur, ps'eo tom an ouarn (?)
En enor dezan, strakomp hom daouarn !

5

Marcel Cachin, war lærc'h Jaurez,
Zo en penn « An Humanite »
O terc'hel ar Bed war evez
Eneb taoliou ar follente !
Ma lak da grena ar Pennou brasa,
A renko terri pe blega ;
E læc'h d'er sponta 'vo biken hini,
Nag Hitler, na Musolini ?...
A renko d'ho zro douja d'al Lezen,
Pe voint distroadet evel an Derven ?
Taolet naed a blad gant eur barr-avel !
Pa gresko skiant ar boblou Izel.

6

Ogen, tud ar Bed a zalc'ho
Gant furnez holl de n'em dostad,
Ma vo taolet prest er blôto
Brezellou, kiriek d'hom gwall stad :
Hag hor bugale a welo hep mâr,
Ar Peoc'h o ren war an Douar ;
Gant Kannadet gwestl d'ober Loëaldet ;
Frankiz da glask an Evrustet !...
En deiz-se, Marcel, te vo da vemor,
Adare gante er penn a enor !
Met ni da c'hortoz, kanomp diboez-penn ?
Gloar ha meuleudi, dit, da virviken !

Da vignon koz

Ch. ROLLAND.
(Roll-diroll)

Pellen Guerlesquin

(L'écheveau de Guerlesquin)

Kear Gwerliskin,
Stum eur pinsin,
Harpet he fen
Grab an dosen :

Gwerliskin. Gwerliskin.
Pebeuz hano sklinton !
Neuz lec'h all 'bed er vro
Da gaout ken baer hano.

An holl a oar eo Gwerliskin
Dreo ar merc'het skanv ha lirin,
Lec'h 'roaer bec'h da vad atao
D'an danz-tro ha d'ar *jabadao* !

Biken kerz-ar-bed barz en Gwerliskin
Na yelo gant he zud war an tu-gin ;
Rag er penn kenta 'vefont holl dalc'hmad
O c'heuil pep neventi koulz ha pep stad.

Na neuz ked en tu all da baotret Gwerliskin
Da zistaga ken brao taoliou kaer da c'hoarzin :
Met ma vefent biken 'n'ho lanchen tapet ber,
Taolit plaed, gallaouet ? pe vezo tom d'ho ler !

Met ma zeuz paotred diflat, tud a dan en Gwerliskin,
Zeuz hiniennou ive du ho c'hreiz ha flour ho min (!)
Merc'hejou kaez dilabour, teuzet pennou ho daoulin
O klask touelli Doue da c'heul tud kaez Gwerliskin !

C'hourvezout 'ra gant tre 'vel en pep lec'h all
Ha beza deuz ive hag he mad hag he fall :
Eur bern a pao flakoc'h an dour evit ar gwin,
Darn all ra kalz n deill en paroz Gwerliskin ?

Neuz forz ! setu m'hon en lost ar *Bellen*
Heb beza e dibunet penn-da-benn,
Na roet d'hanaout d'an dud a ijin
Petra ententer dre c'hir « *Gwer-liskin* » :

Hogen, zeu deu deuz *gwern-losket*,
Da laret eo koat gwern devet,
Zuillet araok ma oa Gwesklin
Deud deuz Tro-Gô da Werliskin...

En kreiz kear en ti-kear koz,
Eur Menhir en anter-noz,
Kestel poaz, seiz kos melin,
Setu lorc'hach Gwerliskin !

He holl venvedigez
So en mein menerezh ;
Na zent, na froez, na lin
Na zao en Gwerliskin.

Neuz netra re,
En gwirione,
P'omb holl tud fin
En Gwerliskin.

ROL-DIROLL